

A dioraz eur brezegeñ, de leint

HO MAMM !

214

An ton war « FEIZ HA BREIZ », Miz Here 1926.

1

Ha pa oac'h bihan, paotred, o !
 Ha pa oac'h bihan,
 N'ho peus ket klevet, paotred, o !
 N'ho peus ket klevet
 Ho mamm d'an noz o kana d'eoac'h,
 Ho mamm, d'an noz, e kanan d'eoac'h,
 Ha pa oac'h bihan, paotred, o !
 Ha pa oac'h bihan.

2

War he chapeled, paotred, o !
 War he chapeled,
 N'oc'h eus ket gwelet, paotred, o !
 N'oc'h eus ket gwelet
 Ho mamm o pedi evidoc'h ?
 Ho mamm o pedi evidoc'h ?
 War he chapeled, paotred, o !
 War he chapeled.

3

E tal ho kavel, paotred, o !
 E tal ho kavel,
 N'oc'h eus ket gwelet, paotred, o !
 N'oc'h eus ket gwelet
 Ho mamm o nezan evidoc'h ?
 Ho mamm o nezan evidoc'h ?
 E tal ho kavel, paotred, o !
 E tal ho kavel.

4

E korn an oaled, paotred, o !
 E korn an oaled,
 N'oc'h eus ket gwelet, paotred, o !
 N'oc'h eus ket gwelet
 Lagad ho mamm troet warnoc'h ?
 Lagad ho mamm troet warnoc'h ?
 E korn an oaled, paotred, o !
 E korn an oaled.

5

Eus daerou ho mamm, paotred, o !
 Eus daerou ho mamm,
 Dalc'hit sonj bepred, paotred, o !
 Dalc'hit sonj bepred,
 Ne 'z eus netra krenfoc'h er bed,
 Ne 'z eus netra krenfoc'h er bed,
 'Vit daerou eur vamm, paotred, o !
 'Vit daerou eur vamm.

6

Tremen 'ra pep tra, paotred, o !
 Tremen 'ra pep tra,
 An dud hag ag roz, paotred, o !
 An dud hag ar roz.
 Met bean 'z eus traou a bad bepred,
 Met bean 'z eus traou a bad bepred,
 'Vel ar baradoz, paotred, o !
 'Vel ar baradoz !

J. LE BAYON.